

Parrez Plouye.

Guerz Sant Mathurin ⁽¹⁾

TON *Kelven*, pe : *Breuriez ar Feiz*.

DISKAN

Kanomp da Zant Mathurin, kanomp eur verz neve ;
 Studiomp holl gant evez kenteliou he vue,
 Ha bezomp leun a fianz e skoazel gallouduz
 Eur zant hag a ro aman grasou ken talvouduz.

1.

Sant Mathurin, ginidik euz a gerik Larchant,
 Abred mad a ziskoueas 'vije eun deiz eur zant ;
 Rag, daoust ma oa payaned hag he dad hag he vamm,
 E chomas 'n he yaouankiz bepred fur ha divlamm.

2.

Doue roas d'ar zantik an heur-vad da glevet
 Komzou eun eskop santel (Polykarp oa hanvet) ;
 Ganthan e oue kenteliet, ha ganthan oue ive
 E dour zakr ar vadiant gret bugel da Zoue.

(1) Pardon braz sant Mathurin a ve gret d'an eil zul a viz Mae.

3.

Eur veich gant Mathurini^k kavet ar sklerijen,
 Ne lezas ket he gerent 'kreiz an denvalijen ;
 Var bouez ober pini^jen, ha pedi evithe,
 D'he vamm, d'he dad e reas anaout ar guir Doue.

4.

Sant Polykarp, o velet he vue ken parfet,
 Hen galvas, d'he ugent vla, da veza beleget.
 Savet d'eur gark ken huel Mathurin a boanias
 Da lakât he zantelez da greski muïoc'h c'hoaz.

5.

A hent all, digant Doue ar Zant hen devoa bet
 Galloud d'ober burzudou, burzudou kaer meurbed,
 Hag he vrud a oa redet pell-pell e mæz ar vro,
 Ha betec Rom oa neuze anvêet he hano.

6.

An Impalaer Maximin oa nec'het he spered :
 He verc'h Maximiana oa, siouaz ! possedet ;
 Hag an diaoul a embanne, dre c'hinou ar brinsez,
 Ne oa 'met Sant Mathurin evit he gass er mæz.

7.

Setu eta kannaded karget gant Maximin
 Da vont tre bete Larchant da glask Sant Mathurin ;
 Mes, kerkent ma oue skignet ar c'helou dre ar vro,
 He vignoned, he gerent a oue nec'het maro.

8.

Buhan avad e teuas ar gannaded a benn
Da lakât ar sperejôu dispont ha dianken.

« Pa vo ganthan, emezint, ar brinsez dilivret,
« An den zantel ganomp-ni d'ar ger vo digasset. »

9.

Sklerijennet gant Doue, Mathurin a zentas,
Ha da heul ar gannaded, var eul lestr e pignas,
Mes ar mor, 'pad ho beach, a oue ken dirollet
M'en em gavjont e danjer holl da veza kollet.

10.

'Vel gueichall an Ebestel var mor ar Galile,
An holl dud, er vatimant, gant ar spont a grene ;
Ar Zant a bedas Doue, ha Doue, d'he beden,
Reas d'ar mor kounnaret chom sioul en eun tol krenn.

11.

Pa oue e penn he veach Mathurin digouëet,
Prim ez eas da velet ar brinsez possessedet ;
Ha, kerkent m'en em lakas da bedi evithi,
E rankas an drouk spered tec'het pell diouthi.

12.

Ar Zant, goude, a chomas e Rom epad tri bla,
Ha liez gueich e reas ar burzudou kaera ;
Pa oa neve digouëet, dre c'halloud he beden,
E tilivraz ar ger-ze taget gant ar vosen.

13.

Epad tri bla e poanias, hag e poanias dalc'hmad
Da zistrei ar bec'herien, da gelen an dud vad ;
Goude beza gonëet kalz eneou da Zoue,
E oue, leun a viritou, galvet da vont d'an Ee.

14.

E Rom, oue gret kalz henor da relegou ar Zant,
Ha goude, menac'h santel ho dougas da Larchant ;
Hag eno e oue guelet pelerined a bell
O tont gant devosion da c'houlen he skoazel.


15.

Meur a chapel 'n he henor zo bet gret abaoe,
Hag unan hon euz ive var zouarou Plouye ;
Gant hon tadou oue savet, dre anaoudegez vad
Evit ar Zant beniget a oa outho ken mad.

16.

Evel gueichall hon tadou, ni fell domp kenderc'hel
D'henori Sant Mathurin, o pedi 'n he chapel ;
Ennhi e kaver yec'hed ar c'horf hag ann ene,
Hag ive grasou nerzuz da vont varzu an Ee.

Imprimatur :



Quimper, le 4 Mai 1905.

E. FLÉITER, Vic. gén.

Kemper, moulet e ti AR. DE KERANGAL.